

AN AMZER

NIV. 2 12 PAJ. 2 LUR

BEP EIL GWENER

TRUBUILHOÙ EN IRANGOUDE AR GURDED
AN AMERIKANED

GANT ERWAN GENEL

Teheran.- Gant an Iraniz eo bet touellet mat an Amerikaned a-benn ar fin. Ar re-mañ a oa re fizius e pennoù-stad Bro-Iran ha dreist-holl en Aotrou Bazargan (maodiern kentañ betek Dimeurzh 6 a viz Du), e kredent e oa muioc'h a galloud gantañ, hag en Aotrou Ibrahim Yazdi (maodiern an Aferioù Di-

avaez betek ar sizhun dremenet ha lakaet da harpañ an Ao Bazargan), e kredent e oa a-du gant an Amerikaned evel ar peurrest eus ar re a oa bet anvet da vaodierned er gouarnamant nevez.

Gwir eo en doa diskleriet an Aotrou Bazargan, goude d'ar (Kendalc'h pajennoù 6&7)

UN DISKOUEZADeg VRAS
DIWAR-BENN AR GREMM E BREIZH

Emeur o prientiñ e Breizh un diskouezadeg vras diwar-benn kudennoù ar gremm (an energi-ezh) en hor bro. Digoret e vo evit ar wech kentañ en Naoned d'an 11 a viz Ebrel 1980 ha diskouezet e vo goude e meur a gêr all: Roazhon, Brest, Kemper, Gwengamp, Felger, An Oriant, Sant-Brieg, Montroulez, Kastell-Briant, h.a....betek miz Du 1980. Pal an diskouezadeg-mañ

a vo dreist-holl broudañ an dud da esperniañ ar gremm da da gas war-raok an doareoù-gremm nevez: avel, heol, aezhenn diwar an teil, houl ar mor, h.a.

(Lenn e pajenn 8 ar pennad anvet: "Aveldredanva Enez Eusa" hag a vo kendalc'het en niverenn 3).

MOUEZHIADEGOU E STADOU UNANET

EN EM GINNIG A RA EDWARD KENNEDY

Washington.- En un doare ofisiel en deus diskleriet Edward Kennedy e oa emstriver d'ar mouezhiadegoù dilenn prezidant ar Stadoù Unanet.

Daoust d'an tamalladurioù taolet warnañ gant kelaouennoù amerikan 'zo, diwar-benn e vuhez prevez, dreist-holl a-zivout gwallzarvoud Chappaquiddick e-lec'h e oa bet kavet beuzet ur sekretourez yaouank dezhañ en e garr-tan, e krog senedour Massachussets gant ar stourm-dilenn e-barzh strollad an Demokrated. Er strollad-mañ e vo diaes ar stourm-dilenn abalamour d'an daou emginnig a-bouez: hini Edward Kennedy diouzh un tu hag hini ar prezidant Carter diouzh an tu all.

Er strollad Republikan ez eus dija nav emginnig, en o zouez hini Ronald Reagan, a oa endeo emstriver d'ar mouezhiadegoù e 1976.

DIROUDENNADUR UN TREN E KICHEN TORONTO

Toronto.- 250.000 annezad korn-bro Nuississanga evel meur a viliad tud o chom e bannlev Toronto a zo bet pedet da vont kuit diouzh o zi.

Ar pennoù bras a soñje dec'h e vije tarzhet ar wagon 30 tonenn klor enni a-benn ar fin gant flamennoù ar bagonioù all.

Den ebet a zo bet gloazet, met meur a hini anezho, o chom e-kichen ijinerezhioù e-lec'h m'eo c'hoarvezet ar gwallzarvoud, o deus diwasket kalonlosk hag ivez drougoù all.

L.G.

Kroget en deus pep tra gant ur stlejad bagonioù gant klor e-barzh. Diroudennet en deus an tren-se Disul tremenet. Risklus eo ar gaz-se. Se a zo perak eo bet ret d'an dud divroañ. Gallout a reer en em c'houlenn bremañ ar pezh a vefe c'hoarvezet mar bije bet dilero'hiadoù skinoberius e-barzh an tren.

A.E.

PETRA EO BERLIN HIZIV?

(KENDALC'H AR PENNAD KROGET EN NIVERENN 1)

Bez e oa c'hoazh e 1974 5.000 soudard a Vro-C'hall, 9.000 soudard a Vro-Saoz ha 13.000 soudard a'r Stadoù Unanet o chom e Berlin-Kornog. Evit ar bloaz-mañ e chom war-dro 15.000 pe 20.000 soudard e Berlin-Kornog, pa'z eus tro-dro da vBerlin-Reter 15 rannarme harpet gant an Unaniezh Soviedel: ur soudard rusian dre 102 annezad ha 10 soudard rusian dre km² ez eus e Republik Demokratel.

Kreñv-tre e chom c'hoazh aotrouniezh pep bro ha n'eus nemet soñjal ez eus tri aerborzh evit Berlin-Kornog: unan gall (Tegel), unan saoz (Gatow), hag unan amerikan (Tempelhof).

Sinet eo bet an "Dezvad pevarzuek" (Statut quadripartite), a vez melestret Berlin gantañ, gant an Unvaniezh Soviedel e feuremglev an 3 a viz Gwengolo 1971, ha ket a-raok. N'o doa ket asantet sinañ kentoc'h peogwir e felle dezho kenstagañ Berlin ouzh ar Republik Demokratel. E 1948-49 o doa zoken klasket mougañ teir zachennad all Berlin dre o c'haelañ diouzh peurrest ar bed ha lakaat ar re gevredet da vont kuit. Ne zeujont ket

a-benn dre ma oa bet savet ur pont nijerezoù etre Berlin hag ar Republik Gevreadel, met en abeg d'an darvoudoù-mañ eo e voe rannet Berlin e div dachennad.

Ouzhpenn anaoudegezh an dezvad a oa meret Berlin gantañ abaoe 1945, ez eus tri c'hraf er feur-mañ: kreñvaet e vo liammoù armerzh ha liammoù arc'hant etre Berlin hag ar Republik Gevreadel. Ar frankiz a vo d'an dud a chom er Republik Gevreadel da vont da vBerlin dre zouar, dre aer h.a. Ha posubl e vo da verliniz-Kornog mont da vBerlin-Reter (evit un devezh hepken: difennet e vez tremen an nozvezh er Republik Demokratel).

Abaoe dezhi bezañ kêrbenn an Impalaeriezh hag ar Reich alaman, e oa bet kresket kalz Berlin, ha deuet e oa da vezañ ur greizenn c'hreantel ha kenwerzhel eus ar re bouezusañ en Europa, hag aet e oa Berlin dreist-holl d'ur greizenn evit ar c'hehenterezhioù, he forzhstêr o vezañ, d'ar mare, an hini vrasañ er bed. Lakaet eo bet diaes adsav armerzhel ar gêr en abeg d'he rannadur, met tizhet eo bremañ peogwir he deus adkavet Berlin he flas er

PETRA EO BERLIN HIZIV? (Kendalc'h ar bajenn 3)

bed armerzhel.
Kêr gentañ Alamagn eo adarre evit pezh a sell ouzh niver ha dishenvelder ar c'hreanterezhioù, en o zouez kimiezh, treloc'herezh (ijinerezh ar mekanik) hag ijinerezh ar boued dreist-holl, ha-se ken er c'hornog hag er reter.

Liammet e vez Berlin gant ar rannvroioù all dre ganolioù e-leizh, hag eo aerborzh Tempelhof an hini brasañ hag arnevesañ er bed.

Distrujet kalz eo bet Berlin e-pad ar brezel-bed ha ne chom nemet un nebeut savadurioù kozh, savadurioù baroko, evel palez Charlottenburg hag ar "Zeughaus", hag ivez savadurioù klasel nevez: dor Brandenburg, an "Neue Wache" hag ar c'hoariva Schauspielhaus. Met adsavet eo bet penn-da-benn Berlin hag ur greizenn sevenadurel ha speredel eus ar re vrasañ eo bepred. Bez ez eus kalz levr-aoeigoù, mirdioù, skolioù-meur hag all... daoust ma'z eo bet distrujet lod bras ar savadurioù ha meur a zastumad er mirdioù. Bez ez eus skol-veur Hunbolt, levraoueg foran ar Skiantoù hag Akademiezh Alaman ar Skiantoù e Berlin-Reter, ar "Freiuniversitat", skol-veur

ar c'halvezerezhioù ha skolioù-meur e-leizh e Berlin-Kornog.

Berr eo istor Berlin peogwir n'eo brudet a-walc'h nemet abaoe nebeut amzer. Div gêr a zo da orin kêr vBerlin: Köln ha Berlin a voe krouet en XIIIvet kantved war ribl ar stêr Spree. Kêrbenn vBrandenburg ha Prusia e oa Berlin adalek ar XVvet kantved betek 1877, ma voe unanet Alamagn gant Bismarck ha lakaet Berlin da gêrbenn an Impalaeriezh.

N'eo ket evelkent Berlin ur gêr evel ar re all. N'eus nemet soñjal en niver a dud o tigriskiñ e Berlin-Kornog: e-pad pemp bloavezh (69/74) o deus 100.000 den kuitaet ar gêr, hag e 1974 eo bet kontet 38.000 den marvet ha 18.000 den bet ganet. Eveljust e kresk evel e peurrest Alamagn niver al labourerien estren o tont a Vro-C'hres, Yougoslavia, Turkia, Italia ha Portugal.

E.G.

Ar wech a zeu:
- "Ar Voger hag ar stignhouarn"
- "Lu Bro-C'hall e Berlin"
Evel-se e vo echuet gant studiaden Alamagn ha Berlin a vremañ.

SPORTOU

20.000 BREIZHAD
ENTANET EVIT
AR VELL-DROAD

Roazhon. - Daoust hag eo match Tours/Roazhon hag en deus degaset 20.000 Breizhad e sportva straed an Oriant Disul tremenet? Evit kalz sur. Met lavarout a ranker e vez bep dro dek pe bemzek mil arvester a zeu d'ar sportva. Eno emañ evit harpañ o strollad a dra sur. Petra natureloc'h evit ur c'hlub a ya mat en-dro hag ouzhpenn a zo breizhat.

Met n'eo ket hepken eus klub Roazhon ez eus anv. Efel a ranker ivez Gwengamp, Brest hag An Naoned en diwezh. E kib Europa o deus roet bec'h d'o c'hevezerion. Evit ur wech

FEVARE REDADEG WAR DROAD
BREST-ROAZHON: KALZ REDERIEN

34 skipailh a oa war an alf. Un abadenn-sport a-bouez e oa. Hag eo skipailh Pondi, ur wech adarre, en deus gounezet oc'h echuiñ ar 267 km e korf 16e42m 52s: ur gur eo. Hevlene ez eus bet kalz muioc'h a dud oc'h arvestiñ. Dav eo eta kalonekat ar rederien-se da genderc'h-el en o gourdonerezh evit ober ar wech a zeu Brest-Naoned. Perak ket?

gourc'hemennoù d'ar bellendroad breizhat a ro deomp un arvest mat hag a ra plijadur deomp. Roazhon en deus roet lamm da dTours: 1/0

14/18 AVIZ MAE 1980
GOUEL AR BREZHONEG
NA PLABENNEG KET!
ZISONJIT KET!

GOUDE AR GURDED...

(Kendalc'h ar bajenn gentañ)
studierien iranad bezañ aloub-
et e miz C'hwevrer kannaddi ar
Stadoù Unanet: "A-benn bremañ
e kontrollin an traoù evit ma
ne dremenno ken adarre evel-se".
Kredet o doa ennañ an Amerik-
aned, met diskleriet e oa bet
n'eus ket pell gant an Ao
Bazargan: "Ma lavarfen e
c'hourc'hemennan hiziv, ne vefe
ket ar wirionez ganin." Anataet
eo bet ar poent-mañ gant afer
ar c'houestlidi.

Evit pezh a sell ouzh an Ao
Yazdi, en devoa pep tra evit
dezhañ bezañ a-du gant an
Amerikaned. Bevet en doa evel
un Amerikan, o vezañ bet da
gentañ studier er Stadoù Unan-
et, ha da c'houde, imbourc'her
e-pad 10 bloavezh en Houston.
Savetaet en doa kannad ar
Stadoù Unanet, an Ao Sullivan,
e miz C'hwevrer, met dek dev-
ezh 'zo e oa eñ e penn afer ar
c'houestlidi.

Gwelet e oa bet dija ar
poent-mañ gant an Ao Brzezins-
ki, div sizhunvezh 'zo, en
Alger, m'en doa kejet gant an
AoAo Bazargan ha Yazdi war
zigarez envoradur ar reveulzi
en Aljeria. Klask a rae Brze-
zinski tostaat an Amerikaned
diouzh an Iraniz, met n'eo ket
deuet a-benn ha pell a-se. E-
pad tost div eur o deus komz-

et, Bazargan o tiskleriañ ne
oa mui a c'halloud gantañ, ez
ae fall-oc'h-fall an traoù;
Yazdi, o tizoleiñ e c'hoari en
ur ziskleriañ: "Ret eo deoc'h
reiñ deomp ar Sha hag e for-
tun, pe anez...". Goude ar
weladenn-mañ, teir sizhunvezh
'zo, eo aet buan an darvoudoù.

UR VANIFESTADEG

D'ar Sul 4 a viz Du e oa ur
vanifestadeg vras aozet gant
studierien Teheran evit ma
vefe lakaet ar Sha er-maez a'r
Stadoù Unanet. Tremeno rejont
dirak kannaddi USA hep klask
kudennoù, met ur pennadig da
c'houde e tistrojont war-du ar
savadur. Tremeno a reas ul lod
bihan anezho dreist d'ar c'hi-
li hag ez ejont en ti, hag ur
mare da c'houde, e voe gwelet
an Amerikaned o tont er-maez,
ul lienenn war o daoulagad.
Kemeret o deus ar studierien
59 den o lavarout e vefent
adroet ma vefe kaset kuit ar
Sha diouzh ar Stadoù Unanet.
Kemeret eo bet da gentañ an
afer-mañ evel renet gant tud
digontrollet, met just goude
an darvoud, e tisklerias
Khomeiny e harpfe an dud
yaouank (e vab a oa e penn ar
strolladig).

Kroget e oa pell 'zo an

... AN AMERIKANED

enebiezhoù etre an Iraniz hag
an Amerikaned, met betek-hen,
ne oa ket aet Khomeiny ken
pell. Ur gwir vrezel a-enep ar
Stadoù Unanet eo hag en deus
digoret, oc'h atizañ kasoni e
bobl ouzh an Amerikaned.

DILEZ AN AO BAZARGAN

Dimeurzh da noz en deus roet
an Ao Bazargan e zilez hag
hini ar gouarnamant: galloud
ebet a oa gantañ ha ne oa ket
a-du gant an neuz kemeret gant
an darvoudoù. Lakaet eo bet da
c'houarnamant Kuzul ar Reveul-
zi, a oa an holl c'halloud
gantañ abaoe miz C'hwevrer. Ar
c'huzul-mañ a oa bet krouet e
Neauphles-le-Chateau (Bro-
C'hall). Adaozet eo bet penn-
da-benn ar c'huzul-mañ 'ta hag
e vo graet a-benn nebeut ad-
reizhadurioù nevez.

AN DAOU HANTEROUR AMERIKAN

Etre Dilun ha Dimeurzh ar
sizhun dremenet (5, 6&7 a viz
Du), ez eus bet eskemmoù etre
tud Washington ha tud eus
Kuzul ar Reveulzi e Teheran.
Dimeurzh en doa divizet Jimmy
Carter, goude bodadeg Kuzul ar
Surentez, kas 2 hanterour gant
asant Kuzul iranad ar Reveulzi.
Da 15 eur e oa, ha da 20 eur e

kemennas Khomeiny ne vije ket
resevet an daou Amerikan. Dis-
lavarout a reas an Imam Kuzul
ar Reveulzi peogwir ne oa ket
bet lavaret dezhañ an dra-mañ.
Evit an daou zen, e voe ret
dezho chom en Istanbul.

ARAFAT HAG A.D.P.

(ADP (OLP): Aozadur Dieubiñ
Palestina).

E-pad sizhun an darvoudoù
en deus en em ginniget Arafat
da hanterour. Kaset en deus
daou zileuriad da dTeheran
evit gwelout hag eñ e oa
posubl kas da vat e venoz, rak
a-raok dezhañ kregiñ en afer-
mañ, e felle da ADP bezañ sur
e teufe a-benn. Setu perak, pa
oa an Amerikaned o kemenn an
diskoulm-mañ, e nac'he paotred
ADP, hag e nac'hont atav betek
ma vo sur ez eo posubl. A-raok
mont da dTeheran, e oa tremen-
et an daou zileuriad dre Is-
tambul. N'eus bremañ keloù ebet
a-zivout an diskoulm-mañ, met
unan kredus eo atav. N'emañ
ket ar Stadoù Unanet a-enep,
hag evit Arafat, e vefe un afer
politikel mat. Diskouez a rafe
ez eus ivez soñjennoù denel
gant A.D.P. ha n'eo ket ar
strollad-mañ ur strollad a
sponterien nemetken. Ouzhpenn-
se e fell da ADP, abaoe nebeut,
(Kendalc'h pajenn 12)

AVELDREDANVA ENEZ EUSA

Ur stumm ispisial eus an energiezh diwar heol eo a-benn ar fin energiezh an avel, peogwir eo skinoù an heol a ra an avel. Gant an heol e vez tommet an aer en ul lec'h bennak. An aer tommet a sav war-du krec'h, o lezel plas d'un aer yenoc'h. An dilec'hiañ aer a zo avel.

Posubl eo bet d'an EDF gant sikour an "Dileuriadur evit an Energiezhoù Nevez" sevel un aerdredanva bras en enez Eusa Graet e oa bet betek-hen unan all hepken ken bras e Nogent-le-Roi hag unan un tammig bihanoc'h e Bro-Normandi, met ne oant ket kalz efedus.

Unan eus an energiezhoù kentañ dizoloet ha lakaet da dalvezout gant mab-den eo houmañ. Pevar mil bloaz a-raok J.K. e oa dija rodoù-avel gant sinaiz. Evit dourañ an douar e oa dija bangounelloù o vont en-dro dre an avel e Bro-Egypt hag e Persia.

Bremañ e vez endeo implijet kalz an energiezh-mañ evit meur a dra. Mont a ra en-dro er Stadoù Unanet muioc'h eget 300.000 dredanva o reiñ tri c'hant milion a gilowattad dre un eur e korf ur bloavezh. En Aostralia, e Zeland-Nevez, er

Stadoù Unanet hag en Eurofa zoken, ez a en-dro mereurioù e-leizh dre nerzh an avel. Pa ne vez ket avel, e c'hell mont en-dro an traoù e-pad div sizhunvezh gant tredan bet miret e podoù-tredan.

Met an holl aozadurioù-mañ a zo dreist-holl evit ar mereurioù rodoù-avel bihan o servij da nebeut a dud ha da nebeut a draoù, ket d'an ijinerezhioù, ez eo ret sevel kreizennoù bras evito.

(da genderc'hel)

KEMENNOU...

Ti ar Yaouankiz ha Sevenadur Breizh (22 rue Delambre Paris XVI) a ginnig deoc'h bep Merc'her da 8e30 noz un abadenn gant sonerien, kanerien, pe ur savadenn-luc'hskeudennoù, pe ur film heuliet gant un "débat"...

Dimerc'her 28 a viz Du da 8e30, plijet omp kinnig deoc'h dont da selaou ar ganerien Kirjuhel hag Arbatz, brudet e Breizh evit perzh-mat o c'hanaouennoù hag o harp d'al labourerien o stourm evit mirout o labour ha chom e-barzh o bro. Deuit niverus. Plijadur a vo!

"OUEST-FRANCE"

OC'H EN EM LEDAN WAR-DU PARIZ

Gant tost da 900.000 skouerenn moulet bemdez ez eo "Ouest-France" ar gelaouenn bemdeziek brasañ embannet e galleg, ha moulet e vez e Breizh! Implijout a ra war-dro 1.600 den, ul lodenn vras anezho e kêr Roazhon.

Skignet e vez "Ouest-France" e Breizh a-bez hag ivez dre gornog Bro-C'hall, eus Caen betek La Rochelle. Fellout a ra bremañ d'e renerien gounit tachenn er broioù-krec'h ha klask aloubiñ korn-bro Pariz e-lec'h m'emañ o vevañ ouzhpenn 700.000 Breizhad bet ganet e Breizh, ha 2.000.000 den a orin breizhat. A-benn nebeut e teuio er-maez un embannadur eus "Ouest France" evit departamant an Yvelines (e-lec'h m'emañ Versailles), ha goude-se e vo klasket nebeut ha nebeut gounit tachenn en departamantoù all en-dro da bPariz.

Brezel a vo eta etre "Ouest-France" hag ar c'helaouennoù embannet e Pariz ha tro-war-dro, met un doare eo d'en em zifenn evit O.-F. Abaoe miz Du 1978 e vez moulet (dre "fac-simile") ur bern kelaouennoù eus Pariz e Breizh (e Sant-Hermelen, e-kichen Naoned):

L'Equipe, Le Parisien Libéré, L'Aurore, L'Humanité, Le Matin de Paris, Libération ha Le Figaro. Kelaouennoù Pariz a vez kavet bremañ abred diouzh ar beure en holl gêrioù e Breizh, ha gouzout a reer e fell d'an Ao Hersant (Le Figaro, France Soir, La Liberté du Morbihan, L'Eclair...) ober hep dale embannadurioù ispisial eus "Le Figaro" & "France Soir" evit Breizh ha kornog Bro-C'hall. Gwadus e vo eta ar stourm...

Gant O.-F. e vez moulet dija meur a gelaouennoù all: La Bretagne à Paris, Morbihan Eclair, Le Marin h.a., hag ivez abaoe daou vloaz ur bern levrioù. Emañ renerien "Ouest-France" e soñj krouiñ a-benn nebeut, marteze ivez e 1980, ur gelc'hgelaouenn sizhuniek gouestlet d'ar vuhez sevenadurel e Breizh hag e kornog Bro-C'hall.

LEVRIOU PLADENNOU KASETENNOU
HA PEP TRA DIWAR-BENN BREIZH
HAG AR BREZHONEG...

COOP BREIZH

17 straed Penhoet ROAZHON
hag ivez Ar Baol ha Pariz

KELAOUENNOÙ

"IMBOURC 'H" NIV. 117

Gwellat eo bet stumm ar gelaouenn, dre m'eo hevelep hirder pep linenn bremañ: plijusoc'h eo da lenn. Kavet e vez en niverenn-mañ dreist-holl ur studiaden: "Dante ha Diskar ar C'hristenva" gant Youenn Souffez Despre. Ur pennad-istor, diaesik evit tud dizek war an danvez-mañ, dudius avat.

"EVID AR BREZHONEG"

Niv 140 (1 a viz Du 1979)
"Evid ar Brezhoneg" a zo gouestlet d'ar bleizi e Breizh gant ur pennad-kaoz hag ur pennad-skrid. Ouzhpenn-se e kaver evel bep gwech kemenoù hag ar vandenn dreset gant Malo Louarn: "An Danvez-Kannad"

"DIHUN"

Daoust dezhi chom gant peder fajenn, ez eus bet roet ul lañs nevez da "zDihun": skrivagnerien nevez hag eveljust menozioù nevez. Liesseurt eo an danvez, fentus dreist-holl. Kavet e vez Dihun e-barzh ar gelaouenn "Breizh".

"BREIZH"

Resevet hon eus niv. 250 "Breizh". Adroet ez eus bet adarre ul lañs nevez d'ar gelaouenn evit an niverenn 250. Dudius-tre eo atav: pennadoù diwar-benn diougan Merzin, "The Canadian Celtic Congress", Gouel ar Brezhoneg, ar bruder-ezh e brezhoneg. Arabat disoñjal ivez ar rummadoù a vez kavet bep gwech. Bez ez eus war ar marc'had ur pennad-kaoz gant Yvon Labarre, ul livour breizhat.

H.C.

Mar fell deoc'h kavout ur wir skingomz ha skinwel breizhat, kenlabourit gant

SKINGOMZ HA SKINWEL
"AN ASKOL"
22820 PLOUGOUSKANT

Skodenn: 20 real (5 lur) hepken
Ma fell deoc'h ivez deskiñ pe beurzeskiñ ar brezhoneg, skrivit d'ar memes chomlec'h evit kaout titouroù.

SKINWEL (FR3)

Disadorn 13e30: BREIZH O VEVAÑ
Dimerc'her 19e50: NOZVAT
Disadorn 19e45: NOZVAT

ABADENNOU
SKINGOMZ
SKINWEL

SKINGOMZ

PEMDEZIEK (ket d'ar Sul)

KELEIER

07e20 Brest (OM & MF)
12e20 Brest (OM & MF)
12e25 Gwened (MF) e gwenedeg

SIZHUNIEK

DIMERC'HER

"AR SEIZ AVEL"

10e15/11e00 Brest (MF) &
Gwened (MF)

DIGWENER

"TEBR HA HOLEN"

10e15/11e00 Brest (MF) &
Gwened (MF)

DISUL

"LIV AN AMZER"

11e00/12e00 Brest (MF) &
Gwened (MF)
13e00/14e00 Roazhon (OM) &
Brest (OM)

N'eus nemet an abadenn-mañ
hag a vez posubl klevout e
Breizh a-bezh.

ABADENNOU SKINWEL P. 10

UR SEKRED KEGIN: ARC'HANTOURION

25 munutenn evit prientiñ, 10
munutenn poazhañ.

Ezhomm ez eus:

- 100 gr. bled ha kement a
amann
- ur c'hartouron sukr
- 4 gwenn-vi

Lakait er gwenoù-vi, bet
mesket gant ar sukr e-pad un
hanter- eur, ar bled hag an
amann, bet tommet un tamm. An
toaz a die bezañ evel koaven.
amannennit mouloù bihan ha
kelc'hiek, hag o hanter-leugn-
it gant an toaz. Lakait er
forn e-pad 20 mn. Dav eo d'ar
forn bezañ tommet mat.

"AN AMZER"

2 sd ar Richardiere
35100 ROAZHON

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU (12 niverenn):

Reizh: 18 lur
Studierien, skolidi: 12 lur
Skoazell: 25 pe 30 lur

KRP (Decambourg): 25.97V Roazhon

Moulet ez eus bet 300 sk.
a'n niverenn-mañ

DARVOUDOU IRAN (Kendalc'h ar bajenn 7)

tostaat ouzh ar Stadoù Unanet evit bezañ anavezet ez-ofisiel ganto.

AN EOULMAEN

E-pad ar meurzhvezh goude an darvoudoù e oa ar brud o redek ne vefe ken roet eoulmaen gant Iran d'ar Stadoù Unanet. Nac'h-et e oa gant kevredigezh vroadel an Eoulmaen iranat Dimerc'her diouzh ar beure, met diskleriet o deus memestra ar Stadoù Unanet e oa bet paouezet gant kas an eoulmaen diouzh Iran Dimeurzh da noz. An eoulmaen iranat a zo anezho pevar dre gant hepken a'r c'hasadurioù d'ar Stadoù Unanet, met se a zegasfe evelato un trubuilh bennak en ur vro klañv an armerzh enni. Diskouez a ra ez eus un arm spontus gant Khomeiny, dreist-holl evit broioù Europa ar c'hornog.

Eus pep korn ar bed e teu diskleriadurioù o c'houlenn ma vo echuet gant an afer-se. Ar Pab hag ivez nav ministr europat an aferioù diavaez o deus kaset pep a gannad. Fellout a ra da A.B.U. ha d'an Ao Kurt Waldheim, d'an Arabed (ken a gleiz hag a zehou), bezañ hanterourien. Fall eo pep diskoulm ha n'eus netra evit kas an afer war-raok.

Er Stadoù Unanet e teu da vezañ tomm ar c'hedveno, kasoni ouzh an Iraniz o kreskiñ: manifestadegoù e-leizh a vez aozet a-enep an Iraniz hag ez eus bet endeo un den lazhet. Evit ul lod bihan eus an Amerikaned, ne ra netra Carter, met evit al lod brasañ, ez int a-du gant e bolitikerezh.

“Diouzh o zu o deus” Dimeurzh tremenet addispleget an Iraniz abegoù gwirion an darvoud-mañ: “Arabed disonjal impalaerouriezh ar Stadoù Unanet” en deus lavaret an Ao Bani Sadr.

.....

Evit echuiñ ez eo dav lavarout ez eus abaoe ar Meurzh 13 a viz Du un disemglev etre pennoù-stad Bro-Iran hag ar studierien. Ne fell d'ar studierien echuiñ an afer-mañ gant un treuzvarc'had ma krog da gomz anezhañ Kuzul ar Reveulzi.

Erwan GENEL

D'HOL LENNERIEN

Hir eo pennad Erwan Genel diwar-benn darvoudoù Iran, ha bihan eo hor c'helaouenn... Neuze eo bet diaes deomp lakaat an holl bennadoù e-barzh an niverenn-mañ hag a zo dija karget. Hon digarezit evit ar pennadoù a zo bet lezet a-gostez.

.....